




Bleun-Brug Pont-e-Kroaz.

Photo Jos LE DOARÉ, Châteaulin

Bleun-Brug

Niv. 50

MEVEZEN 1952

BLEUN-BRUG BRAS LANDREGER

en enor da Sant Erwan

(1-2-3 a viz Eost)

Eur c'helou hag hon laka seder :

Goueliou « BLEUN-BRUG BRAS » e Landreger.

Sonit trompilh sklentin

Ha c'houi, taboulin,

Bombard ha biniou,

Kleier an touriou,

Ken ma skloko

Ma tregerno

Ar reier war ar meneiou,

Da c'hervel ar Vretoned,

Koublet ha bodet,

A-dreuz an henchou,

Ar saonennou, ar gwaremmou

Eus an Argoad d'an Arvor.

Sant Tual a zigoro frank e zor,

Dor an iliz-veur,

Eun iliz seurt n'eus nemeur.

Ha Sent Breiz

A zeuio e-leiz,

Da heul Sant Erwan,

D'ar goueliou splann.

Breiz an Neñv hag an Douar

O lida goueliou dispar.

An Ao. BESCOND

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Madobour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère).
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).




Photo Jos. LE DOARÉ.

An oferenn e Landevenneg d'ar 5 a Vezeven deiz gouel ar Sakramant.

MIZ AR BARA BEO



KALON ar c'hristen a lamm gant al levenez o welout pegen beo-buhezek eo an Iliz santel, e Vamm.

Kerzout a ra divrall gant e hent, e-kreiz an trouz, ar freuz hag ar brezelioù, evel m'hel lavare ar breizad Hello.

An testeni nerzus ha padus a gement-se, ha n'eo ket, eur wech muioc'h, ar goueliou dispar, nevez echuet e Barselon, en enor d'ar Zakramant meulet ra vezo ?

Kant milierou a gristenien a zo diredet di, eus pevar c'horn ar bed katolik, da zaoulina dirak ar pezh n'en deus nemet doare dister eun tammig bara, met a zo kuzet ennañ, e gwirionez, holl c'halloud hag holl c'hened Doue.

Kant milierou a galonou o deus tridet eno gant ar memes feiz, ar memes karantez evit an Osti, a zo gouest hepken da zavetei ha da unani ar bed paour, dispennet ha debret gant ar gasoni.

Braster divrall an Iliz a zo en Osti se, e trid enni kalon an Den-Doue. Abaoe tost da zaou vil bloaz 'zo, eus an Osti eo e tiskenn ar sklerijenn en eneoù, an nerz er c'halonou, ar garantez wirion a zo diazez an holl oberou mat ha santel. Eus an Osti c'hoaz eo e sav bepred galvadenn entanet Hor Salver :

« Ma fell d'eoc'h kaout ar peoc'h, me eo ar peoc'h se. Ma fell d'eoc'h kaout an eürusted, me eo an eürusted se. »

N'eus ket diou eienenn a eürusted, n'eus nemet unan, ha ne vezo morse dizec'het, goude ma teufe an holl da eva anezi.

N'eus ket daou zoare na daou hent da lakaat an urz vat hag ar peoc'h da vleunia a-nevez, er familhou hag er broioù, n'eus nemet unan, hag eo distrei ouz Hor Salver, en em c'hraet bara beo, evit beza al liamm starta a garantez etre an dud hag evit paraa kleñvejou o ene.

Konta rer penaos ar Vretoned kenta a zouaras amañ en Arvor a jomas e-pad eur pennad amzer, hep beleien na menec'h. Hogen, en abeg d'o spered hedro ha d'o youlou direiz, n'oant ket gouest d'ober gwrizioù e nep lec'h. Petra rajont

neuze ? Kas kannaded en tu all d'ar mor, gant kemennadurez da zigas ganto beleien ha menec'h.

Ar re-mañ a deuas niverus hag, e berr amzer, e chenchas an traou. Parreziou a voe savet, an dud a labouras an douar hag a savas tiez. Dibabet e voe tud a benn da ren ar re all, hag, evelse, tamm ha tamm e voe savet eur Vreiz nevez. Met penaos e teuas ar veleien hag ar venec'h da lakaat diazez hag urz vat er vro ? Dre aoter o Doue. Dre ar maen ma konsakrent warnañ an Osti, ha dre an Daol ma rannent an Osti-se gant an dud...

Emaomp e miz Mezeven, miz ar gwiniz oc'h houlenna, er parkeier, evel koummou glas ar mor, ar mare choazet gant an Iliz evit ober gouel an Osti gouel ar Bara beo. Divorfilomp hag adnevezomp hor feiz er mister bras se eus hor relijion, ken frealzus evidomp.

Ene an den a zo graet evit beva eus buhez Doue, bremañ hag a viskoaz : « An neb a zebr va C'horf hag a ev va gwad a jom ennoun, eme Hor Zalver, ha me ennañ. »

El lec'h ma vez enoret, evel m'eo dleet, sakramant an Aoter, el lec'h m'en em vager eus an Osti, ar vuhez kristen a zav, ar vertuziou a vleugn, eno e otezer gouzañv, en-em garet, eno brao eo beva. El lec'h m'eo dilezet an iliz, dilezet an daol zantel, an dizurz, ar vuhez digar, ar vuhez fall a c'hounit tachenn. Kement se a weler bemdez-c'houlou. Eul lezenn eo.

Nag en doa eur feiz beo er Zakramant meulet ra vezo, hor barz karet YANN-BER KALLOCH, hen hag a c'hoantae :

« Beza, dre eur galon c'hlan, eur c'houladenn zister,
O tevi bepred dirak an Osti !... O douter ! »

L. Bleunven.

AR PASTOR MAT

War don :

Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz.

Diskan :

Jezus, Doue, Hon Pastor Mat
'Vidomp 'c'heuz skuilhet hoc'h holl Gwad
Grit ma kerzimp d'hoc'h heul dalc'hmoad.

1. — Ar Pastor Mat 'gar e zeñved
Warno 'mañ e sellou bepred
Ha bepred ganto e spered.
2. — Ar Pastor Mat buhan a red
Warlec'h an dañvad dianket
Laouen pa hen devez kavet.
3. — Ar Pastor Mat 'lak' e holl boan.
Da virout an dañvad, an oan
Ouz dant ar bleiz hag e graban.
4. — Ar Pastor Mat, gant gwir aked,
A glask peuri druz d'e zeñved
Ma ne varvint gant naon nepred.
5. — Gwir Bastor Mat, hon Mestr Jezus
Hon mag en eur stumm burzudus
Gant e Gorf, e Wad prisius.
6. — Ar Pastor Mat, vit e zeñved
A ro e vuhez ma vez red ;
Evel Hon Salver benniget.

Mabig EFFLAMM.

(Person S.-Erwan-Minihy,
Landreger.)

SANT AR MIZ :

SANT BREVALIER

UNAN eus an traou a verk ar muia ene ar Breizad eo an troet ma 'z eo da glask an avantur ha da redek bro. Kement se, an dud desketa a zo holl a-unan evit hen diskleria.

Istor ar vro a zo leun a desteniou eus ar wirionez se, pa gont d'eomp an taoliou kaer graet gant hon holl rederien mor brudet, evel Porzmoger (ginidik a Blouarzel), Couëdic (ginidik a Bouldergerat) ha kalz re all, hag o deus lakaet e-leiz a vrud da goueza war o ano ha war o c'horn bro.

A-hed aochou an Arvor, m'eo hadet enno, ken stank, ar porzioù pesketerezh, e kav ar gouarnamant hag al listri a genwerz o gwella martoloded. Enno ive e vev, diouz eul labour alies start ha risklus, pesketerien niverus hag a zo, adalek ar mousig bihan betek ar bleiz mor kosa, paotred yac'h ha dispont. « Dijentilou ar mor » setu an ano kaer a ro d'ezo an ao. Mevel, en e skridou saourus, diwar-benn Douarnenez.

Met n'eus ket par da istor hor relijion santel, evit diskouez d'eomp splann doare-spered hor c'henvroiz. « E pep lec'h ma tremen ar mor, Breizad a dremen », a lavare santez Katell a Zienn, en he amzer. Hag e gwirionez, en hon touez eo e tiwan atao, ar puilha, an danvez misionerien relijiuzet ha leanezed, an eneoù birvidik-se ha ne gilont ket evit mont da vroioù ar skorn padus, pe da goajou doun an Afrik pe c'hoaz war-zu ec'honderioù divent an Indez pe ar Chin.

Atao ar spered avantur-se, ar c'hoant da anaout ha da welout traou nevez, ar youl da skigna ar feiz ha da c'hounit eneoù da Zoue.

Hag ar stumm ispisial-se eus hon ene breizad a gaver marteze dounoc'h c'hoaz e buhez hor sent koz, eus ar pempvet d'ar seizvet kantved.

Digorit levrioù Albert ar Braz, Dom Lobineau, La Borderie, pe c'hoaz buhezioù sent Marigo, Morvan, Perrot. C'houi gavo atao hevel spere d'advantur : hor sent a zo, koulz lavaret atao, war an hentchou. Chomomp a-sav, mar kirit, da ober anaoudegez gant unan anezo, brudet bras e-pad ar Grenn-Amzer, Sant BRENDAN hag e « Veach vurzudus ».

....

Konta 'raed, gwechall, wardro hanter ar c'houec'hvet kantved, eur manac'h Iwerzonad, e ano Barontus, en eur zistrei eus redek ar morioù, a deuas eun deiz, da c'houlenn lojeiz da zor eur manati. An Tad Abad a c'houarne d'ar mare-se, ar manati, her pedas « da ziroufeima tal ar venec'h, o tisplega d'ezo an holl draou souezus en doa gwelet war ar mor ». « St Brendan, eus an 12 vet kantved, embannet gant Francisque Michel. »

Ar manati-se oa manati Klonfert, hag an Tad Abad oa hor sant Brendan.

Piou oa eta ar sant Brendan-se ?

Anvet eo c'hoaz Brevaler, Broaladre, Brangualadre. An ano diweza se a zo roet d'ezañ e *Leor Oferenn brudet Sant Nougat*, e Litanioù ar sent breizad etre sant Houardon ha sant Herve ; al leor Oferenn-se a bign d'ar Xvet kantved. (Gwelet A. ar Braz « Buhezioù ar Zent »... embannet gant Thomas, Abgrall, Peyron, p. 223.)

An ano a *Vroaladre* a zo douget c'hoaz hirio gant eur porz pesketerezh eus enezenn Jersey, e-lec'h ma touaras, eun deiz, sant Brendan. Eun iliz a zo bet savet war an dachenn m'en em lakeas, hervez ar gredenn, da bedi.

An ano a *Vrevaler* a zo douget gant eur barrezig eus Leon, hag a zo e-kreiz an trebez graet gant Lezneven, Lanniliz, Plabenneg, demdost kenañ da Lanarvili. Sant Brendan a deuas er bed, e Bro Iwerzon, e fin ar pempvet kantved ; en amzer ma veve sant Kolomban, diazezhour bras ar manatioù keltiek.

Abred, Brendan a glevas mouez Doue ouz e c'hervel da vont d'ar gouent. Digemeret e voe, da genta, e Klonard (Iwerzon) ha goudeze e Lancarvan (Bro-Gembre).



Phot. Jos. LE DOANÉ.

Prosesion ar Sent, e Bleun-Brug Leon.

D'ar mare-se, e veve, er c'hreizteiz da Vreiz-Veur, eun dijenñil pinvidik, e ano Gwent; eus e wreg, Dervela, en doa bet eur mab, a oa o vont da zougen, e roll hor sent breizat, an ano bras a *sant Malo*. Brendan eo her badezas hag a reas anezañ eun diskibl. Diwar e benn eo e konter ar burzud-mañ :

« Eun devez m'en doa sant Brendan roet o frankiz d'e ziskibien yaouank, ar re-mañ a gemere o ebat war an aod tosta. Malo, skuiz, a oa pellaet diouz e gamaladed, ha goude beza en em astennet war eur garreg, goloet a vezin bouk, e oa en em roet da gousket warni eus eur c'houk pouner. Ha setu ar mor oc'h uhelaat. Ar baotred yaouank, hep sonjal muioc'h e Malo, a oa distroet d'ar manati. An tarziou ne zalejont ket da lammet tu-ha-tu d'ar garreg, m'edo warni Malo.

Er manati, sant Brendan a oa enkrezet holl war zikour e filhor : den ne ouie petra oa deut da veza, mont a reas neuze da japel ar manati, hag e tremenas an noz penn-da-benn o pedi. Epad e bedenn, eun ael en em ziskouez d'ezañ hag a gas kuit e nec'hamant, en eur lavarout : « Malo a zo beo ; ar garreg m'eo en em roet da gousket warni, dre vuzud Doue en deus graet d'ezi neuial war ar mor : kerz war an tevenn, ha te velo eun enezenn nevez, ha, war an enezenn-se, da filhor o veuli Doue a-greiz kalon ». E gwirionez, ar burzud a oa c'hoarvezet... ha Malo ha Brendan a drugarekeas Doue da veza bet ken madelezes evito.

Prest goude, Brendan a en em lakeas a-nevez da veachi : eus Bro-Gembre e tiskennas e Bro-Arvor ; mont a ra da welat an ermit sant Aaron, a veve war eur garreg, demdost d'al lec'h m'emañ bremañ Sant-Malo.

A-nevez ez a war-du an Hanter-noz, e ra e ziskenn e Jersey, e pign betek ar penn uhela a Vreiz-Veur, evit distrei ac'hano da Iwerzon, el lec'h m'edo e c'hoar, santez Briga, e penn eur gouent leanezed, e Enac'hdin.

Eno eo e varvas sant Brendan, e miz Mae 578, d'an oad a 93 bloaz. E relegou a voe kaset a-c'houdevez, da vanati Klontfert, el lec'h ma tiskuias e Doue, goude beachou abostolik e vuhez.

Sant Brendan, eme ar chaloni Thomas, en e notennou, « daoust ma ne ouezer ket kalz a dra diwar e benn, a zo unan eus ar personachou ar muia brudet e kontadennoù ar Grenn-Amzer.

An holl draou displeget gant ar manac'h-beachour Barontus, e manati Klontfert, a lakeas da ziwan e spered sant Brendan eur c'hoant gwelet-bro souezus. Dont a rajont da gredi ez oa eun enezenn vuzudus, miret gant Doue d'e sent, hag a zoug an ano a Zouar prometet : « Deomp d'he c'hilask », a lavaras sant Brendan hag e seitek manac'h. Hag e pignont, eme ar gontadenn, en eur vag ler, hag e veachont warni epad seiz vloaz, en avantur Doue, hep stur na gouel. O pebez beac'h eslammus oa hounnez ! Ar skrivagner Renan, en e skridou diwar-benn ar ouenn geltiek, en em blij o rei eun ano d'ar broiou-se, dizoloet gant Brendan hag e genvreudeur : bez' ez eo penn pella an Hanter-noz, broiou ar skorn padus, e kostezioù an Island hag ar Spitzberg. Redadennoù spontus, gant leun a zarvoudou a bep seurt !!! C'hoarvezout a reas evelse, eun deiz, gant pesked ar moriou-sklas kaout c'hoant da glevout oferenn sant Brendan. Dini-ver, e reont an dro d'ar vag. War urz an abad santel « ec'h en em renkont holl, brao-kenañ, pep hini oc'h harpa e benn war gein an nep a oa en e raok hag ouz hen dere'hel eun tammig er-mez eus an dour. Hag ar re vihan a oa er penn araok hag ar re vras a-dreñv, en eun hevelep doare, ma welent holl an den-Doue. « Chom a rajont evelse, hervez a gontar, fur ha didrouz, betek ma voe echu an oferenn. Neuze Brendan a roas d'ezo e vennoz, hag ostizien ar mor a yeas adarre pep hini en e du... »

Eur wech all, atao en andrejou-se, Brendan hag e venec'h a gavas Judaz war o hent. O ! an abostol fall en deus gwerzet e Vestr evit tregont diner a zo atao doun en Ifern ! Met eur zulvez, en deus bet, digant madelez Doue, ar c'hras d'ober eun droiad war eur garreg, kannet gant tarziou ar mor-sklas, evit klask eun tammig freskadurez. Eno eo, war ar garreg-se, her c'hav Brendan. « Pa zonjan, eme Judaz da Vreñdan, en tourmanchoù skrijus a zo ouz va gortoz en Ifern, e seblant d'in beza amañ en eul lec'h a zudi. » — « Goulenñ 'ta, en an' Doue, emezañ, digant hor Salver Jezuz-Krist, aotre d'in da jom amañ, epad an noz penn-da-benn ! » Ha sant Brendan, teneraet e galon, a en em daolas d'an daoulin gant e venec'h, en o bag ler, ha Doue, adarre, a ro da Judaz an nozvez didorr a c'houlenne ! « Kredennou ha n'int ket eus ar re eeuna, evel just, met bez' emaoamp amañ e-kreiz ar c'hontadennoù, e bro an enezennou burzudus, war roudou hor sent breizat. »

...

Piou 'oar ? marteze, evelde, e welimp-ni an deiz peurbadus, an heol e-kreiz an noz, marteze, evelde, e tizroimp d'ar gêr, hor sellou beuzet a sklerijenn ha war hon dilhad, evel m'hen asur d'eomp kontadennoù ar Grenn-Amzer, eur seurt c'houez vat eus an neñv ha ne yelo mui kuit eus ar vuhez.

Sent beachourien, pedit evidomp gant an Itron Varia, Itron ar veach vat !

P. B.



DEVEZIOU LANDEVENNEG

12-13-14 a viz Gouere

Landevenneg eo kavell eun darn vras eus hor sent koz, Menec'h Kerbeneat war dismantrou koz Landevenneg a zo krog da sevel eur gouent nevez. An holl Vretoned a roio d'ezo skoazell. Ar Bleun-Brug ho ped da vont da Landevenneg evit ar gouelioù bras a vo enno d'an 12-13 ha 14 a viz Gouere a zeu.

YANN E VEC'H LANN

*Ar pennad-mañ a zo bet c'hoariet
e Bleun-Brug Kastell-Paol 1950.*

An displeger : Evelvoud, sur e-walc'h hoc'h eus sellet piz, meur a wech ouz al loar, hag hoc'h eus gwelet enni eun dra bennak heñvel ouz eun den e tougen eur bec'h lann. Ma c'houlennit digant n'eus forz piou e Breiz, e vo lavaret d'eoec'h eo hennez

Yann e vec'h lann.

Penaos ha perak emañ Yann el loar o tougen e vec'h lann ?

Ar marvailhou koz a lavar d'eomp eo bet lonket Yann gant al loar, evit beza bet o laerez eur bec'h lann, e tantad sant Yann deiz e c'houel. Abaoe eo emañ Yann el loar, kastizet gant Doue evit e bec'hed ha chom a renko eno betek ar varn ziweza.

Ar marvailh-se eo a zo o vont da veza c'hoariet dirazoc'h, en abardaez-mañ.

Gwelout a reoc'h Yann o laerez e vec'h lann eus tantad Sant Yann, ha klevout a reoc'h Doue hag al loar o komz outañ.

Al loar : Emañ an deiz o vervel, emañ en noz o sevel. Ha me eo al loar, rouanez an noz, lagad an noz. Hag e welan an douar, an douar pell-pell, ha warnañ tudigou dister, tudigou a netra bec'h d'in o gwelet.

Me eo al loar, al loar yen, al loar skornet, al loar yen sklas. Hag e welan an dud, ouz va bannou yen, o sevel tantadou evel goulaou, evel gouleir bras a lintro dirak va fas.

War an douar emañ gouel Yann gant an dud, hag en enor d'ezañ e savont tantadou, an tantadou a savent gwechall-gwechall, da enori an heol.

An displeger. — En enor da Sant Yann, ra vo bras ar bern lann, ma skedo an tan flamm e-kreiz an noz du. Ra vo laouen ar baotred, ra vo laouen ar merc'hed hag en-dro d'an tantad, ra vo kan ha koroll en enor da Sant Yann.

(Edo o vont kuit, met dont a ra endro.)

Ret eo d'in avat, lavarout d'an holl araok mont kuit :

Gouzout a rit eo eur pec'hed bras laerez eun hordenn lann, eus tantad Sant Yann, deiz e c'houel.

An neb a laero tan Sant Yann, en devo glac'har ha tourmant.

(An holl a ya kuit nemet Yann.)

YANN : Eur pezh kaer laerez e lann digant sant Yann !

Furnez ! emezo. Follentez ! Sotoni ! a lavaran-me. An dilhad kaer, an danñsou, an tan, an tan foll ouz sklerijenn al loar-gann o deus trevariet d'ezo o spered.

sorc'hennou, sorc'hennou, o marvailhou goulo ! Louzaouen Sant Yann, emezo, tremenet dre an tantad a bare an daoulagad. Glauenn Sant Yann, emezo c'hoaz, a vir ouz ar gurun : istoriou gwrac'hed koz, mat evit gwechall.

Me Yann, a zo distrob va spered, diouz ar sorc'hennou goulo se. Me ne ran forz ebet, en amzeriou kriz-mañ ma 'z eo ken kaled beva, nag eus Sant Yann nag eus e dan nag eus e herdin lann.

Eur bern kaer a lann, e gwirionez ! Ma n'eo ket eur vez koll kement all a geuneud evit petra ! Aet int, sell, da glask merc'hed da zont amañ da fringal en-dro d'eur bern lann.

Da c'hortoz, me Yann, am bezo va lod keuneud, ha n'eo ket amañ eo e vo devet O n'em eus na gwreg na bugale ! Daoust da-se, avat, va bec'h a yelo ganen.

(Samma' ra eun hordenn lann.)

DOUE : Gwelet em eus. Gwelet em eus pep tra. Gwelet em eus da bec'hed e kreiz an noz. Yann, kas endro da vec'h lann.

YANN : Kas petra en-dro ?

DOUE : Kas en-dro da vec'h lann da dantad Sant Yann.

YANN : *(goude poez e vec'h keuneud)*

Met piou oc'h c'houi hag a gomz ouzin ? Eus pelec'h e komzit c'houi ? E pelec'h, e pelec'h emaeoc'h c'houi.

DOUE : E pep lec'h emaeoc'h-me. Hag eus pep lec'h e kouez warnout va malloz. Ra vezo da skouer eur spontailh d'an holl dud.

YANN : Petra, aotrou Doue, va milliga ! Met, evit beza milliget eo ret kaout pec'hejou bras war ar goustians ! n'eo ket evit eun hordenn lann, moarvat, eo e kouezo warnoun ho malloz !

DOUE : Milladou a vloaveziou a zo ec'h anavezan an den, hag atao e vez techet da glask digareziou. Gouzout a rez petra lavare an den kenta : n'en doa debret, emezañ, nemet eun hanter aval. Ha c'hoaz, n'oa ket hen emezañ eo en doa kutuilhet an aval kenta. Gouzout a rez avat pegen bras eo bet kastizet, koulskoude, pec'hed an den kenta.

YANN : Ne ouien ket.

DOUE : Ne ouiez ket ... Ac'hanta, hen deskl a c'hellez bremañ. Kaset int bet kuit ganen. Ha me ivez az kaso kuit. Pep tra o doa da zibri ha da eva... Pep tra evit beza eurus... Ha va el en deus o stlapet er-maez.

Evidout ivez, echu eo pep eurus. Bez' e c'hellfen da stlepel war da benn e puñs an infern. N'her grin ket. D'ar baradoz avat ne deui ket. Ah ! ma oulejes petra gollez o koll ar Baradoz ! *(Klevout a reer m'ouezioù elez.)*

Dre Sant Yann az peus laeret, mont a ri en eul lec'h ma vanko d'it keuneud d'ober tan. En eul lec'h yen-skorn, en eul lec'h gouez, en eul lec'h maro. Lonked a vezi, Yann, bec'h lann hag all, gant al loar. Loar, va bugel yen, kas ganez ar reuzendik-mañ. Ra vezo ennout betek fin an amzeriou. — Amen.

AL LOAR : Trugarez da veza kaset d'in ar beajour-mañ. Yann, deus amañ gant da vec'h lann. Laouen e vezin ganez, Bihan-Bihan out. Dont a rez ennoun dre heg. Amañ ne gavi netra. Paour ouh ha noaz. Ne gavi amañ na gwez, na ti, na tan, na netra. Warnout e vo ar goañv, ar goañv yen da viken.

DOUE : Ha bremañ, kerz, pign en da brizon, a-hed an holl gantvejou.

YANN : Va doue benniget, nag eo spontus evidoun, mont da gluda en eul lec'h ken yen, ken uhel, me hag a zo ken klizidik ouz ar riou.

DOUE : Pa lavaran d'it, atao e kav an den digareziou.

YANN : Her gouzout a ran.

DOUE : Ret d'it gouzout e toudi da virviken eur bec'h lann, hep gellout morse lakaat ennañ an tan ha te o krena gant ar riou.

YANN : Met, va Doue...

DOUE : Hel lavaret am eus.

AN DISPLEGER : E-kreiz an noz du-dall, Yann gant e vec'h lann a zo pignet dreist an douar, dreist an avel, dreist ar c'houmoul, ha kalz uheloc'h c'hoaz...

*Lonket eo bet gant al loar
Sellit ouz al loar gann
Hag e weloc'h Yann
En he c'hreiz gant e vec'h lann.
Evel ma veze gwelet gant hon tadou
Evel ma vez gwelet hirio
Evel ma vo gwelet goude fin ar bed.
Evel-se e kred an dud
Evel-se emañ ar brud.*

An tachadig du-se hag a weler el loar, ma c'houlennit petra eo e vo respontet d'eoec'h raktal :

MOUEZIOU : Yann e vec'h lann.

B. de Parades ha V. Séité.

A L I

An dud yaouank, izili eus kerc'hioù keltiek pe eus B.A.S. a zo war vont d'ar C'hanada, pe gentoc'h da v.Montreal a c'hell skiva da

Jakez Konan, 5466 Park Avenue, App. 45

Montréal, P. Q., Canada,

evit ma vo klasket d'ezo eur gambr a-benn m'en em gavint er gêr-se. O anioù a vo roet da renerien ar strolladou Bretoned ha kavet e vo d'ezo lojeiz dereat a-benn o donedigez. Ra skrivio ar re a zo o kuitat Breiz hepkén.




Photo Jos. LE DOARÉ.

Paotred ar Flamm, Brest, e Bleun-Brug Leon.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Hor goueliou

BLEUN-BRUG Kerne er Pont, ha Bleun-Brug Leon e Plougerne a zo bet lidet d'an 18 a viz Mae, ha d'an 2 a vzeven diweza, gant kalz a don. En hor spered ne oant nemet Bleun-Brugou bihan. Bez' int bet avat Bleun-Brugou bras. N'ouzoun ket ha pardonioù kaeroc'h a zo bet hag a vezo gwelet e-doug ar bloaz-mañ war zouarou Leon ha Kerne.

Er goueliou-se, pep Breizad en deus kavet eur vagadurez klok. Da genta, boued d'e ene, dre an ofereñn 'bred ken kaer, dre ar brezegenn dispar graet er Pont gant an Ao. Chaloni Batany, hag e Plougerne gant an Ao. Ar Gô.

Plijadur d'an daoulagad dre an dançou kaer roet gant Kelc'hiou Kastellin, Lokorn, Douarnenez, Pouldergat, Pouldreuzig, Nevez, Kerfeunteun, Montroulez ha Plougasnou, gwisket en o c'haera. Dudi d'an diskouarn dre ar c'han roet ken parfet er Pont, gant lazou-kana Sant-Vaze Kemper, Gourlizon, Skaer, Treboul, Beuzeg, Landudeg, Skolaj Pont-e-Kroaz, hag ar barrez; e Plougerne gant Landi, Plouzeniel, Skol ar Groaz-Ruz Lambazellec, Skol ar baotred Lokournan, Tregloun, Gouesnou ha parrez Plougerne. Ken dudiet all or bet o klevet sonerien Kastellin, Douarnenez, Kemper (Kevrenn C'hlaizik), Paotred ar Flamm, Brest ha Kerfeunteun.

Ha petra da lavaret eus ar brosesion gaer he deus klozet an daou Vleun-Brug-se. Ret eo beza o gwelet evit gouzout petra int bet.

Er Pont, goude misterioù ar Rozera c'hoariet dirak dek mil a dud, eo bet eur marz gwelout prosesion vras ar Gwerchezed : bannielou, statuiou, kroazioù, dilhazou kaer : aournamanchou, perlez, dantelez... pebez taolenn gaer !! Nag e tride ar c'halonou, nag e kane ar bardonerien meuleudi Itron Varia Roscudon, en-dro d'ezhi Itron Varia 'r Sklerded, Plounevez-Forze; Itron Varia ar C'helou mat Lokorn ha Plozevet; Itron Varia ar Mor, Treboul; Itron Varia Gerineg, Poullan; Itron Varia Konforz, Meilar; Itron Varia Pennorz, Pouldreuzig; Itron Varia Loreta, Plouhineg; Itron Varia Lamgroaz, Beuzec; Itron Varia 'r Veaj Vat, Plogô ha prosesion meur ar barrez all. Ken skoet e oa darn eus an dud ma veze gwelet meur a hini o skuilh daerou.

E Plougerne an daolenn a oa marzusoc'h c'hoaz. Dirak ar mor divent, eur mor a dud hag eur mor a gan. Leoniz a oa eno leun a dan ha leun a feiz, start en o c'hredenn evel ar reier bras sounn dirazo.

Eur podiom bras a oa dirak ar mor, bannielou outañ o ficher gant an avel greñv, war daolenn c'hlas ar mor eonennek. Mikael an Noblez a zeu da genta, en-dro d'ezañ bizinerien ar barrez gant o binvioù labour. Displega a ra d'ezo unan eus e daolennou. Goude e tremen dirak an dud, taolennou beo eus buhez hor Salver displeget gant an Ao. Chaloni Fave dre ma tremenont. Warlerc'h e teu ar brosesion vras. Ugent parrez a vro-Leon a oa eno hag eur barrez bennak ive eus Bro-Gerne.

Kelc'hiou keltiek, sonerien ha lazou-kan, mesk ha mesk gant ar parrezioù, tremen a reont en eur gana kantik Sant Mikael Arc'hél.

An dud ivez a gan e-keit ha m'ac'h en em led ar brosesion a-hed an tevinier, betek Roc'h ha Feunteun Dom Mikael.

An taol-lagad neuze a zo dispar ! Kroazioù alaouret, bannielou arc'hantet, dilhazou a bep liou, bombard biniou ha taboulin, trouz ar mor ha kleierigou ar c'hroazioù, ha war c'horre eur bobl o kana a bouez penn hag a greiz kalon. Eun dudi ! Eun dudi !

Bennoz ar sakramant war ar podiom a glozas ar gouel bras. An Ostansouer alaouret douget gant an Ao. 'n Eskob Fauvel, a sav a-us d'an dud, a-us d'ar mor, etre an Neñv hag an douar, e-kreiz an avel vras...

Meuleudi da Zoue, d'ar Werc'hez d'an Elez ha d'ar Zeñt. Meuleudi ha bennoz. Mouez an Ao. 'n Eskob eo a sav bremañ. Komz a ra eus brasder ha galloud an Aotrou Doue, eus ar mor divent, e donnou hag e reier diniver, eus ar c'houlmoul an avel hag an douar, eus Dom Mikael an Noblez o prederia war e roc'h vras hag oc'h ober pinijenn aze en e lochennig araok kregi gant e visionou...

« Feiz karet hon Tadou, morse ni ho nac'ho, kentoc'h ni a varvo » ! a youc'h an dud.

Echu eo Bleun-Brug Kerne.

Echu eo Bleun-Brug Leon.

Koulz er Pont hag e Plougerne, aet eo kuit an dud goude ar gouel, buan ha didrouz, leun o spered o c'halon hag o ene a daolennou kaer ha glan. N'eus bet warlerc'h na ballou diroll, na c'hoarielloù botizarus ha dizonest, na tud vezo na dizurz ebet, evel ma weler re alies goude kalz pardonioù, siouaz ! Deuet eo ar Bleun-Brug da veza unan eus kaera pardonioù Breiz-Izel.

Kenstrivadegoù ar Bleun-Brug

LABOUR pouezusa ar Bleun-Brug a zo amañ. Lenn, displega ha kana a brezoneg evit bugale ar skolioù; kanaouennou, rimadelloù ha prezegerezh evit ar re vras.

Er Pont n'eus bet prezeger ebet. Daoust ha diviet e vefe da vat prezegerien Bro-Gerne ? Met ar c'han hag ar rimadelloù o deus kavet yaouankiz. Lomik Kavarle eus ar Pont a zo bet da genta evit ar c'han, ha Loeiz ar Go hag Alin ar Gelleg eus Pouldregat evit ar rimadelloù.

Ouspenn kant a vugale skol a zo bet o kenstriva. Setu amañ anioù ar re genta evit pep rummad :

Lenn (paotred) : Kerveillant ha Kerloc'h, Landudeg ; Ar Goff (Saint-Blaise), Douarnenez. — (Paotrezed) : M.-T. Selton, Pouldregat.

Displega (paotred) : Kerveillant ha Kerloc'h, Landudeg ; Ar Flour, Gwaien. — (Paotrezed) : N. Ar Gouil, Y. Pouchoux hag A. Ar Goff, Pouldregat.

Kana (paotred) : A. Berlivet, Treboul ; J^e Bokou, Gwaien ; L. Ladam, Primelin.

Ar skolioù o deus bet kaset bugale da genstriva eo : Treboul, P. ha M. ; Douarnenez, P. ; Pouldregat, M. ; Landudeg, P. ; Plozevet, M. ; Plouhineg, M. ; Pont-e-Kroaz, P. ; M. ha Skolaj ; Beuzeg, M. ; Mahalon, M. ; Gwaien, P. ; Kleden, M. ; Primelin, M. ; Poullan, M. 16 skol en holl.

E Plougerne ez eus bet ouspenn daou c'hant a vugale o kenstriva. Dek jury a zo bet renket lakaat war sao evit dont a-benn anezo, araok an ofereñn bred.




Photo Jos. LE DOARÉ.

Bugale skol Lokournan e Bleun-Brug Leon.

Setu amañ ar vugale o deus bet ar prizioù kenta e pep rummad :

LENN (*Paotred*) : Y. Balanant, Kleder ; Job ar Gad, Grouaneg ; F. Loseg, ar Grouaneg. — *Paotrezed* : H. Bodenes, Lannilis ; E. Leon, Plougerne ; M. Korr, ar Folgoat.

DISPLÉGA (*Paotred*) : B. Kostiou, Sizun ; J.-Y. ar Born, Gwiseny ; Jos. Fave, Gwiseny. — *Paotrezed* : M. ar Rouz, Plouzeniel ; T. an Den, Lannilis ; M. Korr, ar Folgoat.

KANA (*Paotred*) : D. Gweguen ha F. ar Roue, Lokournan ; Y. Laot, Landi. — *Paotrezed* : M. Gwegen, Plougerne ; M. T. Kermarreg, Plabenneg ; Y. Morvan, Lannilis.

Ar skoliou-mañ o doa bugale e kenstrivadegoù Plougerne : Kleder P. - Sizun P. - Lesneven M. - ha skolaj - ar Folgoat P. ha M. - Ar Grouaneg P. ha M. - Plougerne P. ha M. - Gwiseny P. ha M. - Lannilis M. - Plouzeniel P. ha M. - Plabenneg M. - Landivizio P. - Lokournan P. - Kernilis M. - Mili-zag P. - Brignogan P. — Ar pezh a ra 21 skol en holl.

...

Muioc'h a skoliou ha muioc'h a vugale a zo bet o kenstriva e Bleun-Brug Leon, ha muioc'h ive a re vras.

Gabriel ar C'horr eus Lannilis hag Elian Pronost eus Lesneven a zo bet da genta evit ar C'hanaouennou ; Job Lostiz eus an Drenneg ha Mari-L. Kabon eus Lannilis, evit ar Rimadellou.

Holl emañ ar re yaouank-mañ en Y.K.A.M. Per Chapalan eus Kastell, unan eus ar renerien, a lavaras dirak an holl pegen laouen e oa o welout an Y.K.A.M. chachet gant ar Bleun-Brug. Eur galv a reas d'ar yaouankizou da zont da ober pelerinaj Tro-Breiz, goude an eost.

...

Ma n'oa ket a brezegeerien er Pont, e Plougerne ez oa anezo. Enor da Vro-Leon. Mar deo douget Kernevez d'an dafis ha d'ar c'han, Leoniz a ziskouez beza muioc'h douget d'ar prezeg. Aet eo bet ar maout gant Job ar C'horr hag Anna Kabon eus Lannilis.

Ar c'henstrivadegoù a zo bet renet er Pont gant an Ao. Cnal-ni Ar Ster, Ensellour, hag e Plougerne gant ar Breur K.-M. Korantin, Assistant-meur hag Ensellour eus urz Frered Ploermel.

Peb tra a oa renket en eun doare dispar gant K. Riou hag J. Tandé eus Urz Frered St-Gabriel, Job Seite hag Y. Troal, beleien.

Bennoz Doue d'ar varnerien niverus ha meuleudi hag enor d'ar re vras ha d'ar re vihan a zo aet ganto ar maout. Holl e tleont beza e Bleun-Brug Landregor d'an 3 a viz Eost. Lavaret e vo d'ezo e pelec'h e kavint kirritan da vont du-hont.

C'hoariva.

Er Pont n'oa ket a c'hoariva. E plas ez eus bet roet eun abadenn sinema. Gwelloc'h e vefe bet peziou-c'hoari brezonek.

E Plougerne ez eus bet diou abadennad peziou-c'hoari, holl eus oberoù an Aotrou Perrot.

Eur bern tud a zo bet o welet. Kalz re vihan e oa ar sal, siouaz ! Kement-se a ziskouez ez eus tu c'hoaz da c'hoari peziou brezonek.

« Ar Vamm » c'hoariet gant Lannilis a lakeas daerou puilh da redek, koulz e Plougerne hag e Lannilis. N'eus ket a beziou-c'hoari fromusoc'h, e brezoneg. Diës o ve ive c'hoari gwelloc'h.

« Kornandoned Sant Kadou » roet gant Paotred ar Grouaneg a zirouden-nas pep tal. Mar fell da sant Per kioza ouzimp ar Baradoz, e ouezimp bremañ penaos ober evit e deneraat.

Petra da lavaret eus « Ar Sant Nevez » c'hoariet gant Paotred Plougerne, darn anezo c'hoarierien goz an Ao. Perrot, bet, e-pad pell, kure er barrez-mañ. An nebeuta ma c'heller lavaret eo en deus bet meur a hini poan gof o klevet hag o welet an Tarz oc'h en em zifreta en e doull.

Meuleudi d'ar c'hoarierien ha d'ar re holl o deus o sikouret da c'hoari ken brao, ha meuleudi ivez da laz-kana Plougerne ha kanerien all.

...

Evit kloza an abadenn, Visant Seite, sekretour meur, a zigasas da sonj d'an dud eus diazezoù ar Bleun-Brug, an Ao. Y.-V. Perrot. An Ao. S. ar Go. a c'hoariva dija komzet anezañ en e sarmoun e-pad an ofernen-bred.

« War an ero boulec'het gant an Ao. Yann-Vari Perrot, abaoe tost da hanter kant vloaz, glepiet gant e c'houezenn, gant e zaerou ha gant e wad, eun eost puilh a zo o tarevi. Ni hag a zo oc'h eosti, dalc'homp sonj en hader a gousk du-hont e-kreiz ar menez e skeud Itron Varia Goatkeo, ha lavaromp gant ar barz :

« Kaer en deus ar bez yen, kuzat ho korf maro,
An efvor ac'hanoc'h, birviken ne varvo.
Keit ha ma vevo Breiz, c'houi 'vezo enoret
Meulet, doujet, karet, ganeomp-ni Bretoned. »

Y. M.

BLEUN-BRUG GUERANDE

Mankout a ra plas d'eomp, evit komz amañ eus Bleun-Brug Guerande, kenta Bleun-Brug Breiz-Uhel. Edo hor c'helaouenn dindan ar wask pa'z eus deuet kelou d'eomp eus ar gouel.

Laouen bras omp, o c'houzout eo bet aet mat tre an traou en-dro. Eur mor tud a zo bet eno ivez evel en hor Bleun-Brugou all. Emañ ar Bleun-Brug evel eun tangwall oc'h en em skigna dre Vreiz a-bez.

Dom Mikael an Nobletz hag ar brezoneg

BUHEZ Dom Mikael a zo bet diskleriet berr, e brezoneg, en eul levrig bet moulet e 1879 ha savet gant an Tad Bleuzen ha ledanoc'h e 1926 gant an Aotrou Chaloni Yann Uguen.

Skrivet e oa bet, e galleg, gant an Aotrou Le Gourvello e 1898. Kavet en doa hemañ danvez evit ober e labour, e Tregarantez. Eun dorn-skrid a oa eno, e maner Kerduden, hag a zisplege en he hed, buhez Dom Mikael.

An Aotrou Perennes a lakeas moula an dorn-skrid-se, e 1934. An dorn-skrid n'eo ket diwar dorn an Tad Maner; an danvez, avat, a ziskouez sklêr an Ao. Perennes, ne c'hell beza diwar den all ebet, nemetañ. Hogen, heñvel eo ouz an danvez a gaver skrid latin an Tad Maner: « *Journal latin des Missions* ».

Goude beza e lennet piz, emañ a da gant an Ao. Perennes, rak eun toul-lad traou a gaver ennañ hag a zo e lev'r an Tad Maner: « *Le Sacré Collège de Jésus* » (1659). Da skouer: p. 165 (Perennes). Il est à naître qui ait vu un seul huguenot natif de cet évêché ou aucun professant l'hérésie dans le territoire de Léon », page 4 (*Sacré Collège*). « Il est à naître qui ait vu un breton bretonnant prescher autre religion que la Catholique ». Skoueriou all a c'hell-pen da rei.

E vamm a oa Lesguern he ano plac'h yaouank. Ar ouenn anezi a oa eus maner koatmanac'h, tostik-tost da Lokournan.

Da vare m'edo al Lesguerned o chom eno, Koatmanac'h a oa e parrez Plouzane.

Ar re ac'hanoc'h o deus lennet buhez hag oberou ar Gonideg a oar eo bet repuet pell hag hir e ti an Ao. Lesguern, e Kervatoux tost da Goatmanac'h.

Warlerc'h ar goueliou bras a zo da veza e Konk d'ar 4 a viz Mae, hag e Plougerne d'an 2 a viz Even, evit enori Dom Mikael, ma chom eur begadig enor da ingala, Lokournan a c'hello kaout eul lodennig eta.

En amzer ma teuas er bed, e Plougerne, e 1677, tud an Noblañs a ouie brezoneg hag e gomze. Diôs e vefe bet d'e vamm, hep-se, kaout afer ouz he mab Mikaelig a oa bet kaset da vaga. D'e bevar bloaz ne responte d'e vamm nemet e brezoneg: Me a zo bet e ti Doue, a lavare d'ez, par veze goulennet outañ e pellec'h e veze bet o c'haloupat.

Edo paotr yaouank, p'en em ziskouezas ar Werc'hez dirazañ. E brezoneg eo ez eas d'ezañ: « Mikaelig, emezi, na ouelit ket, neb aon va mab ho tiwallo ha me ho sikouro ».

Pa va meneg gantañ, diwezatac'h da visiona, e Plougerne, tad, mamm, breudeur, c'hoarezed, a rae goap anezañ, hag e vreur a lavare: « Allas! ar barr en deus kemeret va breur ».

Eur wech all e skrive d'e c'hoar:

« Karantez c'hoar — breur ne goar ».

Eur wech all c'hoaz, e Konk, e kavas prenned-dor e gambr. E brezonek e lavaras:

« Mar be ar wirionez ganen, en hano Doue, dor, digor. Hag an 'nor a zivoraillhas ».

Araok mervel, goude beza bet nouet, Dom Mikael a lakae lenn d'ezañ, bep noz, Pasion Hor Zalver, e gwerziou brezoneg, ha kantikou brezonek.

An hini a rae war e dro, e-pad e gleñved, ne ouie lenn nemet e brezoneg, gwir eo. Met urz Dom Mikael oa e vije roet d'ezañ da glevet yez e gavell.

Ma 'z it da Konk evit goueliou Dom Mikael, arabat d'eooc'h beza souezet, o welet emañ e vuhez skrivet e brezoneg war gwer ar prenester.

Kement oa troet Dom Mikael gant yez e gavell ha dreist-holl gant ar c'hantikou brezonek ma n'oun ket evit kredi n'en dije savet nemet unan:

« Me am eus choazet eur vestres... »

Ar c'hantig-mañ n'emañ ket e unan, a gredan, diwar spered Dom Mikael. Klask a rin an tu, eun dro all, da zibuna ar gudenn.

L. Lok.



Photo Jos. LE DOARÉ.

Prosesion Bleun-Brug Leon'e Plougerne.

GOUEL DOM MIKAEL AN NOBLETZ E KONK-LEON

Diredet eus Leon, Treger ha Kerne, ousspenn 20.000 pirc'hirin o deus lidet e KONK-LEON, d'ar zul 4 a viz Mae, tric'hantvet bloaz maro Dom Mikael an Nobletz.

D'ar zadorn a-raok, evel da zul vintin, an amzer a voe gobariet fall-spontus. Hervez lavariou an dud, edod o vont da gaout glao dour-bilh. Padal ar c'houmoul du a deuzas, an oabl glas hag an heol a zispakas hag a jomas skedus, en-dro da Konk, epad an deiz pad. Eur bursud a-berz Dom Mikael a zanje hag a lavare pep hini...

Kêrig vihan Konk he doa en em lakaet en he c'haera evit rei digemer d'ar berc'hirined ha skuilh brasoc'h levenez er c'halonou.

E gwirionez, pep tra a voe kaer hag urziet eus ar gwella evit ober enor d'ar beleg santel a zo bet gloar BREIZ-IZEL ha skerijenn ar VRETONEZ.

Ar prezegennoù, graet gant an Aotrou KERBIRIOU e galleg, ha gant an Aotrou ABGUILLERM e brezoneg, a ganas meuleudiou ar misioner brudet hag a embannas roll e labouriou hag e vertuziou.

Goude bennoz ar Zakramant, an Aotrou 'n Eskob FAUVEL a glozas ar gouel o trugarekaat ar re holl o doa roet an dourn d'e renka ken kaer, o tenna ar c'henteliou talvoudusa eus buhez Dom MIKAEL hag o c'houlenn diganeomp kendere'hel da bedi, ma plijo gant Doue diskouez e zantelez dre viraklou.

A-raok kuitaat KONK, an darn vrasa eus ar berc'hirined o deus bizitet, gant estlamm ha dudi, er patronaj, skeudennou a zigase sonj eus buhez ar misioner santel hag ive lod eus an taolennou hag an traou bet en e servich.

Ep'ad an deiz, an iliz ne zislounias ket. Pep perc'hirin a c'hoanteas pedi dirak ar bez a vir e relegou hag enori ive kalon an den eürus JULIAN AR MANER, digaset di eus Gemper.



BREUDEUR AN TAD LAMENNAIS

Anavezet mat eo e Breiz urz Breudeur an Tad Lamennais, anvet c'hoaz urz Breudeur Ploermel. Ouspenn kant vloaz a zo e reont skol e Breiz. Er Finister ez eus hirio ouspenn tregont skol dalc'het ganto. Kement all o deus en departamanchou all a Vreiz. Skoliou a zalc'hont c'hoaz e Pariz, en Normandi, er c'hreizteiz, er Spagn, en Amerik an Traoù, en U. S. A., er C'hanada, e Bro-Zaoz, en Ouganda,

en Egypt, e Haiti, e Tahiti en Enezenn Seschel, hag er Japon. An Urz a gont bremañ ouspenn daou vil frer.

Ar Penn-Rener-Meur, ar R. F. Gustave, eur Breizad eus Bro-Redon, marvet e mareou Nedeleg, a zo bet, da Bask diweza, anvet eun all da gemer e blas. An Ao. Rannou, rener technique skol labourerez-douar an Nivot eo a zo bet anvet da Superior-Meur. Eun enor eo evit an Nivot, hag eun enor evit Breiz-Izel. Ar wech kenta eo da Urz Ploermel beza renet gant eur brezonegour, desket gantañ ar brezoneg war barlenn e vamm. Ganet eo bet e Gouezec er bloaz 1902. Hiviziken ne vo anavezet nemet dindan an ano a R. Frer Elisée.

« Bleun-Brug » hag ar « Bleun-Brug » a ginnig d'ezan ha d'an Urz renet gantañ o gwella gourc'hemennou breizek.

Ar c'had hag ar yar-Indez

(Lennit an istor gaer-mañ d'ar vugale.)

GADIG, mab ar c'had, a oa kresket buan, yac'h ha buhezek evel ma oa. Met re lent e oa chomet, ha ne anaveze ket kalz tra c'hoaz eus ar bed.

E dud o doa desket dezañ ar pep gwella eus pezh a zesk ar gerent d'o bugale. Ha bremañ, ar mare a oa deut evitañ da zeski en em ziluzia e-unan, ha da amproui ar gelennadurez en doa resevet. E dad neuze a lezas anezañ a nebeudou da vale e-unan war ar maez. Brasa plijadur ha lorc'h Gadig e voe.

En deizioù kenta avat, ret eo hen anzav, e oa bet spontet meur a daol. Eur wech en doa kredet mervel, ken kreñv m'he doa lammet e galon, o welout eur bern douar gozed o tibrada. C'hoant awalc'h en doa bet da c'houzout petra 'oa dindan, met furoc'h e kavas mont e-biou. Meur a wech e oa bet spontet gant bandennou klujiri o nijal a-daol-trumm a-zirazañ. Trouz pounner bale ar buoc'henned gouez a lakae anezañ da grena, ha pa gleve anezo o tostaat, e haste afo d'en em denna diwar o hent. En em voaza a reas buan ouz an holl grouadurien-ze. Ha deski a reas hep dale anavezout al loened dizrouk diouz al loened drouk, al loened a c'heller tostaat outo hag al loened a ranker chom pell diouto. Brasa aon en doa a oa en em gavout eun deiz bennak gant eur c'hi. Rak eur wech en doa gwelet eun aneval eus ar ouenn-se o redek, en eur harzal gouez, warlerc'h eur c'had, kenderv dezañ.

Daoust da ze, Gadig a veze dudiet bemdez gant tra pe dra. Plijout a rao dezañ, da c'houlou-deiz, pa vez an heol ruz o sevel en diabell diwar an douar hag al laboused o kana en o gwella, mont da c'haloupat war ar c'hlasvez gleborennet. C'houez vat ar bleun a hilige e fronnellou, hag e chome d'o anala hir, difiñv. Pa veze tomm dezañ o redek, e sune ar beradou gliz ouz pennou ar geot. Ha goude, naon dezañ, e tebre ar geotennou. Hag ez ae pelloc'h, en eur droadigellat hag en eur droidella. Nag en deveze plijadur gant ar c'hoari-ze.

Gwech ech en em gave gant eur waz-dour. Plijus e kave selaou an dour o surlal. Met ne dostae ket re, aon en doa eus an dour, ne ouie ket perak. Ha koulskoude e ouie e oa penn-da-benn gant ar waz louzeier druz ha c'houek.

Gwech e tegoueze gantañ kamaraded. Ebatou laouen e veze ganto neuze, o c'hoari en dro d'ar gwez ha d'ar bodou. Ne skuizent ket, ha re vuan e tremene an amzer. Biskoaz ne voe gwelet koulz mignonned. Gant e gamaraded, Gadig a gollas pezh a chome eus e lentegez.

...

Eun deiz avat, Gadig a reas eur gavadenn a goustas ker d'e vuhez.

Redet mat en doa dre ar parkeier, c'hoariet, lammet, ken na oa skuizet zoken. Leinet mat en doa ivez avat. Hag edo o tistrei d'ar gêr, dre bleg eur c'harz, pa chomas sabatuet a-greiz-holl. Dirazañ, war e hent, e oa eur pezh labous bras, kalz brasoc'h eget eur glujar, eul labous n'en doa gwelet morse c'hoaz. Ma vije bet e dad gantañ, en dije desket e oa al labous-se eur yar-Indez. Aon en devoe war an taol, evel pep tro ma wele eun aneval bennak evit ar wech kenta. Met mez en devoe dioustu a veza bet aon. Ha, diasur awalc'h, e soñjas kendere'hel gant e hent. Tostaat a rae, en eur grena, ouz ar yar-Indez. Houmañ ne fñve ket. Gadig a soñjas e vije dereat saludi ar yar, en eur dremen; ha neuze, forz penaos, mat e vije beza gwelet mat ganti. « Salud deoc'h, Itron », a lavaras Gadig, en eur dremen e-biou dezi. Met ne welas ket he fenn, hag e soñjas : « Pelec'h 'ta emañ he fenn ? ». « Salud dit, paotr », a respontas ar yar, gant eur vouez don evel pa deufe eus kreiz he c'hof. Soñjal a reas Gadig he doa ar yar eur penn, peogwir he doa respontet dezañ. Met pelec'h e oa ganti ? Bremañ Gadig n'en defe mui aon eus ar yar-Indez. C'hoant bras a oa savet ennañ avat da c'houzout pelec'h e oa penn ar yar. D'an deiz warlec'h, d'ar memes eur, e tremene adarre dre bleg ar c'harz, hag e welte.

An deiz warlec'h eta, Gadig a dremenas adarre dre bleg ar c'harz, en eur zistrei d'ar gêr. Ar yar-Indez a oa aze. « Salud deoc'h, Itron ». — « Salud dit, paotr ». Met penn ebet ne welas Gadig. Hag e oa strafuilhet bras. Hag e soñje : « Marteze n'he deus penn ebet ». Gadig ne ouie ket e plij da galz a laboused kuzat o fenn e-touez o flu, evit diskuiza pe evit kouskat.

Pa zegouezas er gêr, e c'houlennas digant e dad : « Ha bez ez eus laboused n'o deus penn ebet ? ». Tad Gadig ne respontas ket, mez ennañ marteze o soñjal pegen sot e c'helle beza e vab. Gadig neuze a soñjas ennañ e-unan : « War-c'hoaz e tremenin adarre e-biou d'al labouse-se, dre bleg ar c'harz, hag e ouezin. »

An deiz warlerc'h, echu gantañ e redadennou hag e c'hoariou, Gadig a zistroaz d'ar gêr dre ar memes hent. Soñj en doa, ma ne welte ket penn ar yar, da c'houlenn diganti pe eur penn he doa pe n'he doa ket. Ar yar-Indez a oa aze adarre, e pleg ar c'harz. Tremene a reas Gadig dre he c'hichen. « Salud deoc'h, Itron ». « Salud dit, paotr », a respontas ar yar gant he mouez flour ha don. Kaer en doa Gadig sellout piz ouz ar yar, ne welas penn ebet dezi. Met mez en devoe da ziweza da c'houlenn diganti m'he doa eur penn. Hag e kendalc'has gant e hent, etrezek ar gêr. Ne gredas ket goulenn eur wech all digant e dad pezh en doa goulennet an deiz arao. « Sur on bremañ, a sonje Gadig, n'he deus ar yar-se penn ebet. »

An deiz warlerc'h, Gadig a welas hag a saludas adarre ar yar-Indez, hag ar memes mouez flour ha don a respontas dezañ : « Salud, dit, paotr. » Ha dre ma tostae ouz ar gêr, eur soñj iskis a save e penn Gadig : « Setu eun aneval n'en deus penn ebet, emezañ, ha koulskoude en deus eur vouez ken flour, kreñvoc'h eget va hini. Perak ne vefen-me ket heñvel ? »

Pa erruas er gêr, Gadig a yeas da gemer bouchal e dad. Ya, evel ar yar-Indez e vefe, dibenn, met eur vouez flour ha kreñv dezañ. Ha dao ! ha dao ! Gadig a sko gant ar vouc'hal war e c'houg, ken na ya an nerz digantañ.

Pa en em gavas e dad war al lec'h, penn Gadig a oa tost distag diouz e gorf. Ha kaer en devoe e dad klask pega en dro penn Gadig, ar paour kaez Gadig ne zaleas ket da vervel.

L. Botorel.

(Kempennet ha savet diwar eur vojenn eus ar Brezil.)

AR BREZONEG ER SKOL

Bet digant B.A.S. evit arouezioù bet gwerzet deiz Yann-Ber Kalloc'h : 48.694 lur.

Digant Polig Montjarret, evit arouezioù bet gwerzet deiz Bleun-Brug ar

Pont : 8.200 lur.

Digant Kelo'h Keltiek Lille : 3.300 lur.

Digant U.D.A.B. Paris : 20.000 lur.

Mil bennoz Doue d'ar brofourien. Laket e vo an arc'hant-se da skora hor skol dre lizer ha da baca levrioù brezonek d'ar vugale skol.

KELEIER

Pedennou e Bro-Holland pe Izelvroioù.

Bureo an enklaskou e-touez ar bobl en deus goulennet digant Hollandiz : Ha pedi 'rit a-raok ha goude ar predou ?

14% o deus respontet ya, 32% nann ha 4% n'o deus ket respontet.

En Holland ez eus protestanted, rannet en eun nebeut, rannpredennou, ha katoliked. E-touez ar Galvinidi (protestanted eus rannpredenn Calvin) ez eus 97% o pedi a-raok ha goude ar predou. 93% eus ar gatoliked a ra ivez ar pedennou-se, ha 68% e-touez ar brotestanted « hollandat ».

Hag e Breiz ? E pet familh e sonjer c'hoaz goulenn bennoz Doue war ar predou hag e durgarekaat goude ?

Tud dizek e Bro-C'hall.

Hervez Bureo ar feuriadou (statistique) ez eus e Frañs, e-kreiz an XX^{vet} kantved, 1.115.000 a dud ouspenn 10 vloaz ha ne ouzont na lenn na skriva seurt ebet : eun den war 34 bennak !

A-hend-all, e departamantoù 'zo, dreist-holl er c'hreisteiz, ez eus betek 10% eus ar vugale hag a ra skollig louarn.

Tud paeet mat.

An Nevez-Kaledonia, bro an nikel, a zo... en tu all d'ar bed. Met paeamant paotred ar gouarnamant du-se a zo ivez en tu all d'ar pezh a sonj deoc'h. Da skouer : teñzorier-bras an enezenn a c'hounez (!) 300.300 lur ar miz. Hag ar gouarnour na resev, bep miz, nemet (!) 687.500 lur... Lakit buan hoc'h ano evit kemer e blas.

Pet « bistro » 'zo e Bro-C'hall ? — 507.935 !

Unan evit 83 den (en eur gonta bihan ha bras). En Italia ez eus eun tavar dre 235 den, en Alamagn, 1 dre 273 den, en Holland, 1 dre 365 den.

Eva 'reer 20 litrad alkool pur bep bloaz ha dre benn den (hep diskonta na merc'hed na bugale). Da lavarout eo : 2 wech muloc'h eget en Italia, 5 gwech muloc'h eget e Bro-Saoz, 6 gwech muloc'h eget e Stadoù Unanet Amerika.

Er Frañs, e 1950, ez eus bet evel 520 miliard a win ha 90 miliard a alkoolou, hag ez eus bet devet 140 miliard a vutun. (Met n'ez eus bet dispignet nemet 55 miliard evit ar feurmou-ti.)

Digorit ho kelaouenn ha bemdeiz e kavit enni kannou, torfedou, emlazoù, gwall-zarvoudoù c'hoarvezet war-lerc'h re-eva. Hep konta ar folled niverus beuzet o skiant vat en evajoù alkoolek. Hag al labour kollet. Hag ar vugale siet fall pe nammet, pe en dienez, abalamour d'an alkool lonket gant o zud !

Kazetennoù er misionou.

Kudenn ar yezou a zo bet anezhi a-holl-viskoaz er misionou. Met bremañ eo ret muloc'h-mui d'ar visionerien ober gant yez — pe yezou — ar vro e-lec'h e prezegont. Rak poblou Azia pe Afrika, hag a c'hounez o frankiz tamm-ha-tamm, pe a-daol-trumm, a c'hoanta rei d'o yez ar plas a verit e buhez ar vro. Da skouer, er c'hazetennoù.

Setu perak ez eus kazetennoù katolik embannet e yezou ar misionou. Zoken ma n'eo ket bras-bras niver al lennerien evit ar mare-mañ. Ar gelaouenn bemdeziek, e malgacheg, Isan Andro, ne denn nemet 200 skouerenn. Ouspenn, e malgacheg ivez, ec'h embanner eur sizunieg (o tont er-maez eur wech ar sizun) Lakroa (9.000 skouerenn).

En Afrika r c'hreisteiz e vouler eur gazetenn sizuniek « Moeletsi Oa Basotho » (5.000 sk.) evit 200.000 katolik ar Basutoland. Eur sizunieg e malezeg Praba (2.500 sk.) a vez moulet en Indonezia (Java, Sumatra, h. a.).

Met e Breiz, e-lec'h ez eus tost d'eur milion a gatoliked brezonegerien ez eo disteroc'h c'hoaz stad ar c'helaouennoù brezonek katolik.

Trakteurien.

E 1929 e oa 29.000 trakteur e Frañs ; e 1951, 140.000 : 1 evit 18 stal-labour. Ouspenn ez eus 40.000 trakteurig ha 800.000 moteur war ar maez.

Hag ivez (n'eo ket e Bro-Leon, sur) 1.800.000 buoc'h-labour !

Dastumet gant K. Riou.



KORN AL LIZIRI

AR BLEUN - BRUG ER C'HANADA

Gouzout a ra an holl ez eus eur bern Bretoned o vevad er C'hanada, tomm o c'halon atao ouz o Breiz. Hor Mignon mat Jakez Konan, aet da chom du-hont gant e familh a skriv d'eomp al lizer-mañ :

« Setu ni eta, pell diouz ar gêr ha pelle diouz ar Bleun-Brug. An traou a ya mat ganeomp avât ha n'emaomp ket amañ muioc'h divroet eget ma vijemp bet e Pariz pe en Haor-Nevez. E « Montreal » ez eus eur bernig mat a Vretoned. Nevez digouezet ez eus kalz paotred yaouank eus keic'hioù-keltiek a Vreiz : Rostren, Roazon, Kemperle, Langoned, Kastellnevez hag all... Eun toulladig skouted « Bleimor » a zo ivez.

Sonjet am eus zoken meur a wech e vefe gwelloc'h kalz da dud yaouank Breiz-Izel hag a fell d'ezo divroa, dont amañ eget mont da gêrioù bras Bro-C'hall d'en em goll. Evel just ez eo ret kustumi ouz an dud hag ouz ar vrc, met dont a reer aes-tre d'en em ober diouto hag amañ e vez lezet pep frankiz ganeomp da sevel hor strolladoù evel ma karomp. Breuriez vras ar Vretoned amañ eo « Armor » hec'h ano : renet eo gant eun advokad brudet eus kêr Montreal : an aotrou Penvern a vez graet anezañ. Genidik eo eus Plevin, parrez an Tad Maner. Bez 'hon eus ivez eur c'helc'h keltiek yaouank hag a zo krog da vont mat-tre en-dro. Koroll ha kana e brezoneg o deus graet an dud yaouank dirak ar Maer ha dirak an ao. Léger, arc'heskob Montreal. Brudet bras eo Breiz er C'hanada ha netra nemet lavarout ez eur Breizad a zo trawalc'h evit lakaat kalz a zorioù da zigeri. N'o deus ket ankouaet Kanadiz penaos kenta hini a lakaas e droad war zouar o bro, a oa eur Breizad ! Disu 25 a viz Mae e reomp eun tamm gouel (gant oferenn ha sarnon vrezonek) en enor da Zant Erwan. Gouel Santez Anna avât a raimp « war an ton bras » en eur barrez vihan nepell eus Montreal e Sainte-Anne de Belle-Vue. An Ao. n Arc'heskob Léger eo a vo ar pardoner ! Marteze e teuy Bretoned eus Nevez-York zoken.

Gwelout a rit eta e talc'homp hor c'hrog. Ha derc'hel a raimp d'hen ober mar gellomp chom bodet.

Amañ ez eus labour evit an holl : evit ar baotred ez eo start er penn-kenta, rak ar vicherourien ganadian a glask en em zifenn, met dont a reer a-benn da gavout. Emeur o sevel labouradegoù (uzinou) nevez ha labour a vo evit meur a hini eus hor c'henvroiz. An hini a oar saozneg avat, hennez a c'hell beza dinec'h : an neb a oar diou yez amañ a zo asur da ober pezh a garo. Evit ar merc'hed yaouank ez eus kalz a blasou, dreist-holl e tiez ar vourc'hizien, el labouradegoù (gant gouzout gwriad gant ar mekanik) ha zoken er burevioù.

Pa vo diazezet startoc'h an traou e klaskin kroui er C'hanada eur gevrenn eus ar « Bleun-Brug ». O kregi n'omp ken gant al labour breizek. Spi hon eus avat da c'heilout derc'hel da vont war-raok. Merc'hed breizad eo a ra ar muia-diouer en hon trevadenn (Koloni)... »

J. Conan.

BISKOAZ KEMEND - ALL !

Dont a ra d'eomp eus kloerdi bras Roazon, al lizer-mañ, e brezoneg :

« Eun ugent bennak a genvreudeur eus a Gloerdi Roazon, paotred start en o menoz, o deus lakaet en o fenn, kemerout perz e kenstrivadeg al lazou-kana, e Landreger.


Ho klevout a ran oc'h estlammi : Penaos ? gallegerien o vont da stourm ouzomp evit ar Maout ! Arabat d'eoec'h ober goap ac'hanomp, Frer ker ! Ne vo ket an dro genta ma vo kanet e brezoneg ganeomp. Meur a wech hon eus graet dija a-hed ar bloaz-mañ ; eur wech zoken dirak ar chaloni Falc'hun, kelenner er Skol-Veur, ha deuet d'ar C'hloerdi evit komz ouzomp diwar traou keltiek, evel just...

Evel ma welit, e kanomp dispart, sonn hor pean ganeomp, er c'hontrol. Gant piou e yelo ar maout ? N'eus forz : ar pezh a fell d'eomp eo ma vo klevet ha gwelet e Landreger paotred o kana a-berz Breiz-Uhel a-unan gant an heil Vretoned all... »

Joseph Moy.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER IMP. CORNOUAILLAISE



Bleun-Brug Plougerne.

Photo JOS. LE DOARÉ.

DALC'HIT SONJ !

Bleun-Brug Gwened, e Baod d'ar 6 a viz Gouere.
 Peziou-c'hoari, Prosesion ar goulou, kenstrivadegou, oferenn-bred,
 koroll ha ken ha prosesion vras Itron Varia ar Khlerded evit Kloza. Bezit
 holl e Baod d'ar 5 ha d'ar 6 a viz Gouere.

AN HOLL VRETONED EN EM GAVO

goude d'an 1-2-3 a viz Eost, e Bleun-Brug Bras Landreger en enor da
 Sant Erwan, Paeron Breiz.